

Az C'henta Devez

1

Kalz tud zo ne goumprenon ket
D'ober petra in deut er bed
Eun dra d'ober a netra ken
Ma karfemp-ni klask e c'houm-
[pren

2

M'oun a ran de lavaret d'eoc'h
A koumprenit mat ma keroc'h
Rag oll ni o deuz eun ene
E saveitei ni a glefe

3

Met c'houi a lavaro penos
E c'hounezimp ar Baradoz
M'a euneum gavimp oll euruz
Gant ar Verc'hez a gant Jezuz

4

Miret gourc'hemennou Doue
Ag a re an Iliz ive
Euz ar pec'hejou kapital
Pezo ive d'euneum zivoal

5

Miret gourc'hemennou o stad
Ne rit ket a zrouk met grit vad
Guir eo ar pez a leverez
Ganez eman ar virionez

6

Mes ni siouas no ket amzer
D'ober pen-da-ben on dever
Rag ni gant oll draou an douar
Neuz tregaz te ive a voar

7

Ne pezo ket eun amzerik
Da laret bemdez r'bedennik
Dar zul hag ive d'ar goueliou
Da vont gant feiz d'an ofissou

8

A dar Zul amzer da repoz
Sonjal e gloar ar Baradoz
Amzer evit karet Doue
A neuze d'E veuli bemde

9

A da gerent te a garo
En o c'hozni te souteno
Ag o nesa karit ive
Oll omp da Zoue bugale

10

Lezit neuze traou an douar
Men lavar d'eoc'h ez int goular
Oll klaskit eta dreist peb tra
Savetei ene da genta

16

Dirag an oll ag eb Krena
Diskouez or feiz krenv ni er gra
A drugare Doue n'or bro
Ar feiz kristen neo ket maro

11

A c'houi a vel neuze breman
O kenta dever er bed man
Aleiz a dud a zo dallet
Ag re all c'hoas zo bervellet

12

Poent eo d'eoc'h Itron Varia
Don buan d'or sklerijenna
Ia pe dizale or bro Breiz
A zo o vont da goll e feiz

13

Met kounta reomp varnoc'h Mari
Bemdez e teuimp da saludi
Roit Mari ar sklerijenn
Dar re zo en denvalijenn

14

Evit ma velo an oll skler
Er bed man o c'henta dever
Ni Mari 'vel kristenien vad
O sikouro dre skoueriou mad

15

A gant sikour e oll zent koz
A zo ganeoc'h er Baradoz
Or bro Breiz-Izel a jomo
Eur vro vad a kristen ato

Gouel Maria Hanter Eost 1943

Eur Breizad.

(Emle Mer ne le 24 nov. 1920 a Kerrock Beal
on Compaub Guenileau)

Imprimerie gourdell - Landivisiau
tirage : 150 exemp.

DOUJA AN NIESA

1

Le respect humain e gallek
Douja nesa e Brezonek
A neuz kollet kalz tud siouas
Eb kounta ar pez a rei c'hoas

2

An dud breman a zo troet
Var an dud all da deuler plet
Ober reon egiz a r'all
Eb gouzout pe ve mad pe fall

3

Memeuz n'or Breiz kalz paresiou
Ne vez den vardro n'Ilizou
An neil a ra 'vel egile
A dilezet lezen Doue

4

Meur a barez ne vez goelet
Koulz laret den en ofern bret
Ar gousperou dilezet kren
Da bleac'h eo et ar feiz kristen

5

Kommunia da Bask beb bloas
Ag a zo re neubeut siouas
Gouskoude etouez ar goazet
Aliesoc'h kalz ne zeuon ket

6

Eur c'hristen a ben beza mad
Nan ne glet ket ankounac'had
Beb sul pe ve ien pe ve tom
Dan ofern eo red dezan mon

7

Dar gousperou d'an n'ofern bret
Dar zuliou bras ne vankimp ket
Dar goueliou kaer komunia
Na kaera talvoudusa tra

8

Amzao rankomp ez eo mad
Kentel gaer eur paour kez Brei-
Met dies bras eo da heulia [zad
Gouskoude ia depan e voa

9

Ouz e heulia ma vemp goelet
Diouzomp petra vo laret
Pe ne guir ne vez ket heuliet
Gant koulz lavaret den ebet

10

O tudou paour a c'houi a gren
Dirag tud all dirag eun den
A no peuz ket aoun 'raok Doue
Hen eo or Mestr bras gouskoude

16

Adalek breman sonjit mad
Sonjit e kentel eur Breizad
Rag martese ben eun tachad
E veac'h siouas re zivezad

11

Var an hent mad kerzit bepred
Neuz forz petra vo lavaret
Rag an dud se no tenin ket
Euz an ifern ma veac'h koezet

12

A pa vo deuet ar maro
Neuze o ia keuz o pezo
Da vea krenet dirag tud all
Ag o heuliet gant an hent fall

13

Eun ifern a zo e voezer
'Vel pa ve hini e vever
Kalz tud enan ne sonjon ket
Ken a vezon e barz koezet

14

Dem evel eo finvez an den
Pa vezer pilat eur vezen
Ar vezen a jom leac'h koezet
Met koeza ra leac'h vez bizet

15

Pa vo or buez echuet
Ni jomo ive leac'h koezet
Rag se da c'hedal ar maro
Var an hent mad ni a gerzo

Eur Breizad.